

372

Itron Varia ar Merzer.

(f° 228)

Itron Varia ar merzer me meus amzer kollet
a derempred eur fumelen a ioa fur a parfet

ia ma dije bed madaou evel ma teuaa gened
me a ia breman da embarki var ar mor a dri ga de.
evid kerc'hed d'am mestrez eun habid Satin given.
evid diskoëz d'am brois e meus bed eur plac'h bras.

ag eur plac'h ge a joius evid ma deus madaou.

— me ho suppli va fried nem dest ked var ar mor
ho lestr a zo bihanig ar mor a zo treitour
ho lestr a zo bihanig ag ar mor a zo bras
na ma na verc'h c'houi beuzet petra rapen sivoas!

me zo eur vinorez iaouank na meus na mam na tad
me zo eur vinorezik iaouank e komanç dont er bed
a zo digasset aman ne anavezan den e bed.

Skrivet eo al lizheri partout dre ar c'herious
Beuzet eo ar marc'hadour eun daou pe tri mis zo.
Daoust petra lavaro n'intanvez ar c'helou pa c'hlevo!

eun dervez goude koan pa voa deuet ar noz
Pa voan me ed em goele evid kemer va repos
tri dollik var ar prenest a zo skoët en noz,
Pa voan me ed em goële evid kemer va repos.
— Piou zo arze breman d'ar poent man deus ar noz?
— Savit intanvez iaouank da reço eur present
Da reço halon o fried en eur c'hassed arc'hant.

A me sevel ac'hane a komans da voëlla
Otrou Doue va fried pelech e moc'h breman?

(f° 229)

Penguern indique à peine la séparation des strophes.

373

Marteze c'houi zo maro pem kant leo deus va zi
tolled o c'hez kernigoù d'ar pesket da zrebi.

tavid intañvez iaouank tavid na voëlet ked.
me a zo eur c'hloareg iaouank o pezo mar keret

— Birwiken na zemezan na⁽¹⁾ ne komeran par,
a Breman pa ze maro va vriedig irvoan.

Neb a velche an intañvez o c'hantren en illis
e kreiz etre daou Kapuzin hag hi gwisket e gris.

Neb a velche an intañvez o c'hantren en e c'hramb
e kreiz en tre daou Kapuzin hag eur gloarek iaouank

neb a velje an intañvez var paveo Rouan,
en e zreid eur bouton lejer ag eur bazou stam du
an daelou deuz e daou lagad e c'hanozi ar ru.

An intañvez man lavare eun devez goude koan
me garche beza er barados en eur plassik bian —
e kreiz etre va daou rugel a va vriet irvoan
e non neuze me kanche gant an ellez eurus
Gloria in excelsis te deum laudamus

7

Jarnton puil, 16, juin 1851.

(1). — Ms.: ma; la corr. na est de moi.